

Accueil > Bretagne > Spered ar vro

Pour caozer galo

Spered ar vro

Bretagne Magazine

Les tribus bretonnes

Brezhoneg er familhoù

T Article réservé aux abonnés

Par Julien Meffre

Le 18 avril 2024 à 06h30

Brudet-kaer eo stajoù an hañv Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerion (KEAV) e Kastellin. Moien e vez d'an neb bevañ e brezhoneg e-pad pemzektez. En tu all d'ar stajoù-se e vez kinniget dibennoù sizhun d'ar familhoù.



A-bep-seurt oberennoù e vez kinniget' pad ar stajoù. (Foto Julien Meffre)

Arru an nevez-amzer e Bro-Dreger. E Perwenan, war vord ar mor, ez eus un tregont bennak a dud bodet evit un dibenn sizhun staj. Klevet a reer bugale o c'hoari baby-foot e brezhoneg. Faned Labbay a labour evit ar gevredigezh : « Brezhoneg er familhoù (BEF) ' zo ur seurt pikurenn delc'hen soñj evit ar familhoù a vez kustum dont da Gastellin en hañv. » Gwir eo, meur a studiadenn a ziskouez n'eo ket yac'h lezel ar yezh klozet etre mogerioù ar skolioù. « Krouiñ liammoù etre ar vugale a ranker. Kamaraded. ezed KEAV' zeu da vezañ lod deusouto », eme Faned.

Estreget ar vugale a vez degemeret e-pad an dibennoù-sizhun evel-se. Ninog a zeu he-unan, ha hi kouezhet e pod-houarn KEAV : « Abaoe daou vloaz zo' yan ba'kement staj KEAV zo tout ! » Hervezi, n'eus ken an dra-se evit bezañ en he bleud dre gomz : « ezhomm bras ' m eus bezañ soubet evit mont war-raok ».

Eus Nervouster

Eus a-bell e teuer a-wechoù da vrezhonegañ. Eus Nermouster e erru Mazeas, asambles gant e vab. Kredapl-sur eo ar brezhoneger nermetañ war an enez. « Choazet' m eus komz brezhoneg da ma bugale. Ret eo din gwellaat va live yezh. A-feur ma kreskont ' m eus ezhomm ur c'heriaoueg pinvidikoc'h ». En ur mod e c'heller lavaret e ya KEAV da stankañ bihanentez ar skolioù brezhonek. « Ne c'hortozen ket klevet kement a vrezhoneg gant ar vugale. Deomp-ni e remplas ar skolioù brezhonek. » Gwir bater, e BEF hon eus klevet brezhoneg gant ar vugale hep na vije unan « bras » war o chouk o lavaret « e brezhoneg mar plij ! »

Geriaoueg an aod

À voir aussi : "Nous ne souhaitons pas rester" à Gaza, dit le chef de la diplomatie israélienne Gideon Sa'ar

Veuillez fermer la vidéo flottante pour reprendre la lecture ici.

Stank ha pinvidik eo programm an dibenn-sizhun : d'ar gwener noz, kontadennoù gant Alan Tudoret hag Awen Plougoulm. Da sadorn vintin, bale brezhonegerien deus ar vro. « Evit kas al langach war-raok, ar gwellañ tra eo bezañ e-mesk an dud », eme Erik Jakob paotr Sant-Ke-Perros.

Maël Virot, paotr an Arvor, a zispleg forzhik traoù diwar-benn geriaoueg an aod : « Aze' weler ar Jentilez, ' kichen an aod ez eus ligistri, kranked-brezhoneg pep hini. Abeg all a c'heller kavout da vont di : « Stajoù mod-se o deus talvoudegezh da reiñ fiziñs d'an dud eme Florañs : « ar wech se. » M'ho peus c'hoant da vont war-raok gant ar yezh, na chomit ket etre daou, lakait hoc'h anv evit ur staj KEAV.

Mots difficiles/gerioù diaes

- Kevredigezh : association
- Pod-houarn : chaudron
- Soubidigezh : immersion



Le Télégramme

- Ligistri : homards
- Kranked-Saoz : tourteau



Newsletter Aujourd'hui en Bretagne

Du lundi au vendredi à 19h, les faits marquants du jour en Bretagne

[Nos autres newsletters](#)

E galleg/En français

En juillet, à Châteaulin (29), l'association KEAV organise des stages en immersion linguistique totale. À l'automne et au printemps, se tiennent également des stages à destination des familles (les personnes sans enfants sont les bienvenues). Pour l'association, la question est d'importance quand on sait que, pour l'immense majorité des jeunes, le breton est la langue de l'école. Et cela fonctionne : nous avons pu observer des enfants jouant au baby-foot... en breton sans que cela ne soit « encouragé » par un adulte.

Dans la même rubrique

Abonnés [Olivane ar C'hamm, war al leurenn bepred!](#)

[Levrioù e brezhoneg evit ar vugale - Livres en breton pour les enfants](#)

Abonnés [Ker ar Beleg, produiñ war an tiegezh](#)

Pour aller plus loin

[Spered ar vro](#)

[#Breton](#)



Application
Le Télégramme

Vous aimez la Bretagne ? Vous allez adorer l'application du Télégramme. Profitez d'une expérience de lecture personnalisée et d'un accès rapide à l'actualité de votre commune.



Le Télégramme

Nous suivre



Newsletters La Matinale

Tous les matins à 8h, l'essentiel de l'actualité

[Nos autres newsletters](#)

S'abonner

[Résilier mon abonnement](#)

[Qui sommes-nous ?](#)

[Mentions légales](#)

[CGU](#)

[CGV](#)

[Confidentialité](#)

[Gérer les cookies](#)

[Gérer Utiq](#)

[Plan du site](#)

[Contact](#)

[Newsletters](#)

[Visite virtuelle](#)

[Recrutement](#)

"Nous ne souhaitons pas rester" à Gaza, dit le chef...

Le Télégramme

- Le telegramme
- Blog du Modérateur
- Bretagne Magazine
- Bretagne Marchés Publics
- Diverto
- Essence moins chère
- Le Mensuel de Rennes
- Mer et Marine
- Randonnée en Bretagne
- Régions Annonces Légales
- Tébéo et Tébésud
- Tous à la plage !
- Applications
- Tourisme en Bretagne

- Groupe telegramme
- HelloWork Group
- Viamédia
- Rivacom
- Bright By Rivacom
- Digicairn

Emplois

- Hellowork
- Basile
- Diplomeo
- JobiJoba
- MaFormation
- Seekube
- SmartForum

Sports

- Foot Amateur Bretagne
- OC Sport Pen Duick
- Route du Rhum - Destination Guadeloupe
- La Solitaire du Figaro PAPREC

"Nous ne souhaitons pas rester" à Gaza, dit le chef...